


Ar cheñchamant hin
displeget
d'ar gleskered,
d'an tousegi,
d'ar batrasianed dre vras,
ha d'an holl dud war an Douar
a c'hallfe soñjal e sell oute un tamm



E-barzh ur pikol kasterolenn e oa tri glesker :

an Douar

ur glesker deus ar C'hornôg,
Burt e anv


ur glesker « war esorc'hiñ »,
Fu e anv

wag ur glesker deus ar Su,
Dodji e anv.

Echu an noz, dieub
ha kevatal dre wir
e oa ar gleskered
a-benn ar fin,

ha stank e oa
ar c'helien,


daoust ma ne oant
ket ingalet gwall




1850

D'ar mintin-se e oa mat o jeu gante e-barzh ar gasterolenn.

Met kavet bouton ar gaz gant Burt, hag eñ da soñjal en doa droad da brofitañ deus an aezamant modern.



Diouzh e vod e kavas kement-se, hep lakaat evezh ouzh ur gwiskadig gaz hag aezhenn a groge da vout evel ur golo war ar gasterolenn.




Dont a rae c'hoant da Fu. Hag eñ krog da werzhañ da Burt ur bochad oustouilhioù en eskemm d'un tamm aezamant modern, peogwir en doa droad da gaout kement-se ivez.




Ha Fu da enfredañ Dodji evit ar c'has-degas oustouilhioù dizehan etre eñ ha Burt, en eskemm d'an droad gwall reizh da gaout Kelien.





Ezhomm gaz o doa
an uzinoù
oustouilhoù 'vat, ha
gant beajoù Dodji
e teve muioc'h a
aezhenn c'hoazh.

Kreñvoc'h-kreñv e teve ar gaz da vout ha petisoc'h-petis
ar golo. A-nebeudigoù e teve da vout tommoc'h-tomm.



Burt ^{pe ar GIEC}
en doa soñjet
e c'hallfe bout
un dalc'h aze,

met plijet e oa
gant an dour tomm.






Goude e voe Krog ar c'helien da gouezhañ, ha hejal-dihejal a rae ar gasterolenn gant ar remoul.



Neuze, an tri glesker d'en em vodañ, da anzav e oa un dalc'h,



ha d'ober o soñj chom hep cheñch mann ebet. N'eus forzh penaos e oa blazetoc'h kelien sintetik Fu hag un tammig e oa diskredik ar gleskered c'hoazh.



Hag ar golo gwall dev da fetisaat, ha neuze da chom er memes lec'h un nebeud eurvezhioù, da genderc'hel da fetisaat, ha da vout stankoc'h c'hoazh.



Ha Burt da glask
boutonoù gaz all pa
ranke kaout muioc'h a
aezamant abalamour
d'e lard fall.



Fu en doa
aezamant ivez
breman, met chwezh
gaz pounner a oa gant
kement tra a oa
tro-dro dezhañ.



repuad

Dodji a gawe
dezhañ ne oa
ket brav
bevañ e foñs
ar gasterolenn
ken, hag eñ
da zivroañ
da gaout
ar gorre.



Remoul a voe c'hoazh
ha krog an tri glesker
da ruziañ.

gaz skilt

gweleadoù
en Arktik

smog

Hag int d'en gavout asambles ur wech c'hoazh evit goût ha fur e oa leuskel ar gasterolennad dour da virvin.

Kopenhagen 2009

45 °C a oa dija.

Burt da lâret e oa arabat mont en tu all da 20°C ouzhpenn, met ne zioverfe ket eñ e aezamant 'vat.

Fu da lâret e oa voaien da badout gant 30°C ouzhpenn ha c'hwezha ar gaz, hag e felle dezhañ profitañ deus e aezamant pa oa bet o c'hwezhañ evitañ, hag e c'halle pourveziñ kelien sintetik d'an holl annezidi er gasterolenn.

Dodgi da lâret e oa trawalc'h lazhañ ar gaz ha leuskel e lod kelien gouez dezhañ. An daou all a reas van da chom hep klevet 'vat.

Pariz 2015

En Ostaleri ar Galaksienn e vez kinniget

E vo kig-glesker betvet
hepken, poazhet e-barzh
ar gasterolenn-Douar, war
ar roll da verenn.

e 2100

Eüruzamant,
den ne c'hall mirout
ouzh un troc'h gaz.